

Modèle CCYC : ©DNE

Nom de famille (naissance) :

(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

Prénom(s) :

N° candidat : N° d'inscription :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

Né(e) le :

 Liberté • Égalité • Fraternité
RÉPUBLIQUE FRANÇAISE

1.1

ÉVALUATION
CLASSE : Première VOIE : ☐ Générale ☐ Technologique ☒ Toutes voies (LV) ENSEIGNEMENT : breton DURÉE DE L'ÉPREUVE : 1h30 Niveaux visés (LV) : LVA B1-B2 LVB A2-B1 Axes de programme : Axe 7 « Diversité et inclusion » CALCULATRICE AUTORISÉE : ☐ Oui ☒ Non DICTIONNAIRE AUTORISÉ : ☐ Oui ☒ Non ☐ Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation. ☐ Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur. ☐ Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve. Nombre total de pages : 4

Baccalauréat général et technologique
Langues vivantes régionales - Breton

Classe de première

Compréhension de l'écrit et expression écrite
(3^e trimestre)

<u>Niveau visé</u> LVB : A2-B1	<u>Durée de l'épreuve</u> 1 h 30	<u>Barème 20 points</u> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'**axe 7** du programme : « **Diversité et inclusion** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

KAMPION !

Erwan Konk, kabiten skipailh Bro-C'hall evit ar vell-droad war gador-ruilh en doa tapet titl Kampion ar bed an hañv tremenet e Florida. An tamm brud bet diwar-se a glask lakaat da dalvezout evit broudañ an dud ampechet da dañva e sport.

« N'eo ket bet cheñchet ma buhez », eme Erwan. « Adkavet em eus ma labour er CMB er Releg met anavezet eo un tamm gwelloc'h ar sport-mañ bremañ. Reiñ taol-lañs ar c'hampionad mell-droad e Brest e fin miz Gouere dirak 8000 den zo bet un digarez brav evit diskouez petra eo hor sport. »

Ur cheñchamant a zo en e vuhez koulskoude. Ne c'hoari ket mui e Brest daoust ma chom prezidant ar c'hleub. C'hoari a ra bremañ e Châtenay-Malabry e-kichen Pariz e lec'h ma 'z a bep dibenn-sizhun. Ur skipailh a garfe kas da Gampion Bro-C'hall ar bloaz-mañ. Un titl a vank dezhañ goude bezañ bet Kampion Breizh, Kampion Europa ha Kampion ar Bed. Kemer perzh er c'hoarioù para-olimpik a vije brav dezhañ ivez.

« C'hwitet eo evit Tokyo e 2020 met e Pariz e c'hellfe bezañ degemeret ar sport-mañ marteze e 2024 ».

Ur sport mekanikel eo ar vell-droad war gador-ruilh hag an oad ne gont ket re met gouzout a oar e c'hell e gleñved mont war washaat ha pa vefe stabilaet bremañ. Eizh vloaz e oa pa oa bet dizoloet e oa tapet gant ar viopatiezhañ ha ret dezhañ dilezel ar vell-

droad. D'an oad a 14 vloaz ez adkroge e sport muiañ-karet en ur c'hoari war gador-ruilh. Adkavout a rae santadurioù hag a grede dezhañ bezañ kollet da viken.

Mareoù diaes a zo bet. Tri bloaz zo en doa torret e vrec'h ha kollet nerzh diwar-se met deuet eo a-benn da adpakañ e live. Aon en deus a-wechoù chom hep bezañ gouest da dreiñ e benn un deiz bennak. « Klask a ran chom hep soñjal en dra-se ha kemer ar vuhez evel ma teu. Morse n'em bije soñjet e vijen bet kaset da foetañ-bro kement-se ha fier on eus ar pezh 'm eus bet kaset war-raok » emezañ.

Diaes eo kavout sponsorien evit ar vell-droad war gador-ruilh ha ker e koust ar sport koulskoude : 12 000 € evit prenañ ur gador-ruilh implijet er c'hrogadoù. Peder anezho zo ezhomm dre ma vez 4 c'hoarier war an dachenn. Yalc'hadoù skoazell a vez gant an Ti-kêr, an Departamant hag ar Rannvro.

Ar miz a zeu e lakay Erwan e damm brud da sikour kas an Telethon war-raok.

« Ne gredan ket kement-se e teuo un diskoulm evidon diwar ar enklaskoù medisinezhezh met evit tud all marteze... » Deuet eo a-benn Erwan da gaout ur vuhez emren tamm pe damm... E aotre-bleniañ a garfe tremen avat evit gounit muioc'h a emrenezhezh.

Sillage, Le magazine de Brest métropole et de la ville de Brest, miz Du 2017

1. Compréhension de l'écrit (10 points)

Respontit e brezhoneg d'ar goulennoù amañ war-lerc'h :

- a) Piv eo Erwan Conq? Taolennit anezhañ
- b) Petra a lavar Erwan diwar-benn e gleñved ?
- c) Kalz raktresoù en deus. Displegit.

2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

Goulenn A

« L'électrofoot Brestois », kleub mell-droad war gador-ruilh, a glask sponsorien evit kaout skoazell arc'hant. Skrivit al lizher a vo kaset d'ar stalioù ha d'an embregerezhioù e Brest.

Goulenn B

Pouezus eo ar sport er vuhez pemdeziek ? Ha penaos e c'hell sikour an dud da vezañ degemeret er gevredigezh ? Roit ho soñj.